

# CHANSON NEVEZ AR MERHÉTAER

GROET GANT EUN DEN DEUS AR VICHER

Var ton : PEBEUS QUÉLOU (1) VA DOÛR



1<sup>er</sup> Couplet.

Abaoué an deves miligoet ma chances dor mamu genta  
Cavet eur hoantaden avalou neus mert poanion er bedma  
Martolod Escop dévézour peb hini neus e vicher  
Mes neus quot crioh planeden vit hini ar Merhétaer.

2<sup>e</sup> Couplet.

Mill drubuil mill displijador renq beudé da anduri  
Né al quot poanès un instant ato e dévans sourei  
Evel ar had er raden né gousq morcé met anter  
Pa vé ed an oll da gousquet et red hoas ar Merhétaer.

3<sup>e</sup> Couplet.

Guel zéa béa destomet chadénet vel eur hy  
Laquet da zivoal ar grougué en rouantiler an Torqy  
Béza broudet vel eun azen samet vel eur marh glaouër  
Argasset evel ar bleizi évit béza Merhétaer.

4<sup>e</sup> Couplet.

Né deus nac égor na profit da houit barz er stad  
Couscoudé a ben e hober eo red béza délicad  
Cavet eun téod délibéret eur lagat lem a zéder  
Pacientet eur ganviéden évit béza Merhétaer.

5<sup>e</sup> Couplet.

Red eo dézan vel an targas guelez an dévalijen  
Béza siousl vel ar logaro méur vel eur zilien  
Calonek vel eur lion crapad en guis deur guinver  
Beza sean evel eun évryez évit béza guir Merhétaer.

6<sup>e</sup> Couplet.

Béza jouas a zéder chérissa ar vogalé  
Laret int patrom ho zad vit plioet dar gragué  
Gout trémen brao deus ar té goz silsou mad o solio caër  
Péa dézo banahou lipach évit beza guir Merhétaer.

7<sup>e</sup> Couplet.

cavet dioussouarn deus ar squitra tevel voar pegneusclévet  
Divoal mad da nem vrambaçal deus madeles ar merhet  
Gout an tu da liva guévier nac a vé avéohou setair  
Tonet vé noz da gréis-té évit beza guir Merhétaer.

8<sup>e</sup> Couplet.

Clevet propojou úpítus béza boutet en eojou  
Insultet gant eos rampennet réi a réécou banahou  
Anduri meorbet aliés ar glao an erh an tomder  
Foltra e gorf ac e zillad stard eo béza Merhétaer.

9<sup>e</sup> Couplet.

Miret an nor a vouigourat miret ar hi da barzal  
Monet en ty drear proneet memens dre ar chiminal  
Crapat dreist ar moquério gant lampad dreist ar guicher  
Balé siousl ével ar logot évit béza guir Merhétaer.

10<sup>e</sup> Couplet.

Mestronia e zantiment derhel das voar sonjou  
Hoarzin ganteaon en a galon a destom pis e zaélou  
Quémert ervé mal red dezan eur stum souret pé zéder  
En nem divoazan da ruya vit beza guir Merhétaer.

11<sup>e</sup> Couplet.

Mes ar starda deus ar vicher eo gonid ar merhet  
Quizdikoh marbadouas neus quot voar ar bed  
Deus e divis e zantimant da bep hini renq hober  
Leun domens a sonjou évit beza guir Merhétaer.

12<sup>e</sup> Couplet.

Vit dont aben deus eur meures renquer ober eur gloven  
Vit gonit eun élères gloalhi dei e horzaillen  
Dar merhet a gar e nem beuta ri eur hoel eun davanger  
Laret amploh évit justoh évit beza guir Merhétaer.

13<sup>e</sup> Couplet.

Goudal laquat e oll galloud Joanna e liardigou  
Cavat fourgaç a néhamant cabouillad dre ar poullou  
E vanq aliés e doliou et teu divragou dar guer  
Pinous vel eur hoq diblunet stard eo beza Merhétaer.

14<sup>e</sup> Couplet.

Reuzi ran pa comprenan pegonement a drubuillou  
Ar vizer ao ar boan speret a sauff ar paourkes pitou  
Mes ar merhet zo quantentas a va halon quan tener  
Ma zon en despet dam baro contraigu da heul ar vicher.

K57